

## Ar re binvidik-mor : dreistkeodediz pe laeron ?

Arc’hant o deus, kalz arc’hant, kement ha n’hallomp ket kredañ e c’hallfe bezañ. Galloud o deus, dasparzhet kenetreze, etre tud stummet en hevelep louar<sup>1</sup>, fardet o botoù a-raok o zreid. Hag asant pennoù bras an iliz o deus c’hoazh zoken, a chuchumuchu muioc’h-muiañ koulskoude. Votiñ a reont a-zehoù dreist-holl, a-zehoù-pellañ (dont a ra da vezañ dereat) alies hag a-gleiz ivez gant ma chomo an tu-se klouar-klouarik. En em gavout a reont holl en hevelep lec’hioù evit labourat pe evit en em diduiñ. Kanañ a reont meuleudi an eil d’egile ha da bep hini e vez ispilhet ur vedalenn a enor ouzh e vruched, anat deoc’h. Implijout a reont an nizaj<sup>2</sup>, an trucherezh hag an trafik a levezon, diabaf hag abaoe pell. En em ziskouez a reont frankizourien, pa vez kaoz eus armerzh nemetken avat : huchal a reont ar *Marseillaise* met koachañ a reont lodenn vrasañ o arc’hant er paradozioù fiskal. E Bro-C’hall o deus ouzhpenn ur guzhadenn evit o madoù, mitizien roet un aluzenn dezhe ha difoñcheret diouzh o zailhoù, embregerezhioù a zegas muioc’h-muiañ a c’hounid er bours, a-hend-all e vezont

---

1 Louar : tregerieg, laour pe laouer e lec’h all = *auge*, *pétrin*.

2 Nizaj : nizaj pe niaj = *népotisme*.

gwerzhet ar c'herañ posupl, ar buanañ posupl ha da forzh piv e vefe. Goprouñ an tiegezh o deus zoken, gwerzh-butun 'ta, ur burzhud ! Dastum a reont aes-tre eil tiez, gweturioù chik ha bigi a-stroñs ha betek kirri-nij prevez. Evel-just o deus stummet a-feson o bugale e-barzh skolioù prevez brudet ha war-lerc'h e skolioù uhel ha ker-ruz n'hall nemete goprañ o c'helennerien. Ha ne baouezont ket a glemmichal : re a glask a vefe war o aour, o arc'hant, o diamantoù hag o brientoù. Ha n'int ket jenet da huchal kreñvoc'h evit ar re o deus mil lec'h ar gwir d'en ober. Ha re zo re evit ar re-se diwezhañ, da lâret eo an holl re all. Trawalc'h o deus gouzañvet. Ouzhpenn *bling-bling* eo deuet stourm ar renkad-se a-enep ar re all da vezañ heugus. Evel an enkadenn dibadus er bed a-bezh, harzh ebet dezhi hag abaoe pegeit resis ?

Ha petra eo ar bedeladur-se<sup>3</sup> ma n'eo ket sujañ ar bed a-bezh da youl un nebeudig a dud binvidik, pinvidik-mor. Etrebroadelouriezh an Arc'hent Bras eo ar re-se, an oberiantañ anezhe bepred, margodennerien *Kef Etrebroadel an Arc'hant*<sup>4</sup> int, naonierien taer ar broioù dibourvez bet paourat gante, c'hoarierien an direoliañ, ar re o deus c'hoant bras da "zidabouizañ"<sup>5</sup> o ger gwevnded muiañ karet, evel he doa lâret Laurence Parisot he doa c'hoant da chom kalifez war he zron<sup>6</sup>, *ad vitam aeternam*. Hag evel-just o deus darempredoù reizh-direizh gant o mevelien, afer c'hoari o lamponed. Ha gwech an amzer e reont o c'hañfarded ivez, un tammig nemetken, gant... hmmm, gant un tamm dram, ya se an hini-eo. Buhez al levier a zo ken poanius !

---

3 Bedeladur : ger ijinet moarvat = *mondialisation*.

4 *Kef Etrebroadel an Arc'hant* : K.E.A. = F.M.I., *Fond Monétaire International*

5 Didabouizañ = *détabouiser*, klevet war *France-Inter*.

6 He zron : hini ar MEDEF.

Ha chañs o deus, n'eo ket re zrouk ar gouarnamantoù “kleiz”, aonikoc'h evit ar re zehoù-gwir : linenn stur eeun, gwir eo a-walc'h, met pleustradennoù blot ha hijabl<sup>7</sup>, hijabl-tre. Pebezh diouer a galon gant ar skipailhoù-se memestra pa oa bet disoc'h an dilennadegoù arouez ar spi evit kalz tud, skuizh gant politik rok Sarkozy. Gant e vil kiladenn warn-ugent e ro deomp da grediñ n'eo ket e bal labourat nag evit an holl ken nag evit ar re baourañ. Ar gouarnant-se a bleg dirak ar MEDEF, dirak an ajañsoù-priziañ ha ne labouront nemet evite o-unan, dirak ar c'huzul bonreizh, 9 den ha n'int ket bet dilennet hag a-zehoù penn-da-benn, dirak ar c'huzul stad ha n'eo nemet implijourien uhel stummet a ro alioù, alioù nemetken. Plegañ a ra dirak bed an arc'hant met ne selaou huchadennoù ha leñvadennoù e elektourien nemet ral a wech. Ha komprenet ho peus ! Breinadurezh ar stad a oa e lec'h all nemetken, sañset. Ha bremañ eo splann emañ e-kreiz hini Bro-C'hall ivez, a-gleiz hag a-zehoù ha betek e bennoù kentañ. Soñjit 'ta, daou brezidant kozh ha daou vaodiern ar voujedenn, just a-walc'h, ha muioc'h. Emichañs n'eo ket ken grevus kostez ar rannvroioù, an departamantoù hag an holl lec'hioù. Piv oar ?

Cheñch bremañ a vefe kaout ar galon da dagañ fallagriezh ha pispafaladoù ar re binvidikañ a glask ingal tennañ gounid eus o bro evite o-unan, kaout ar galon da gemm ar bonreizh a ro kement a c'halloud d'un den nemetken, ar prezidant, d'ar c'huzul bonreizh ha d'ar c'huzul-Stad enne tud ha n'int ket dilennet a zo skoilloù evit lezennoù reizh ha ret, kempouez ar vro hag an demokratelezh. Er mare-mañ e vez ar boblañs nec'het, sammet gant dleoù, tailhet, taoset ha korvezet betek re.

---

7 Hijabl : distagadur treger *hejabl* met n'emaint ket er geriadurioù am eus...

Ar re baourañ a bae kement a T.D.O.<sup>8</sup> hag a ra ar re binvidikañ, keroc'h an dour hag an tredan zoken pa vez dalc'het kont eus perzh pouezusoc'h-pouezusañ ar c'houmanant, kevatal evit an holl, e-keñver ar beveziñ. Paeañ a reont muioc'h a dailhoù lec'hel hag a-bell evit ar re pourvezet-mat peogwir n'int ket kenstag ouzh an tailhoù war ar gounidoù. Lemmet e vez diouzh o goprigoù ur sammad brasoc'h-brasañ evit o leveigoù disteroc'h-disterañ... Ar re yaouank o deus nebeutoc'h-nebeutañ a labour met lakaet e vez ar re gozh da labourat muioc'h-muiañ ha pelloc'h-pellañ. Ha koulskoude emañ ar galloud gant an tu kleiz e Palez an Elysée, e Palez Bourbon, e Palez al Luksembourg hag e palezioù an holl rannvroioù pe dost... Pegoulz 'ta e vo lakaet e pleustr ur gwir gemm er Stad, ur gwir justis sokial, ur sell ouzh ar bed a dalc'hfe kont eus Mab-den en e liested hag eus an natur liesliv ha n'eo ket dastum en aner un aridennad moc'hajoù. Pegoulz e vo rannet mat al labour, ar skiant-prenet, an ostilhoù hag ar madoù ? Pegoulz e c'hallio an holl kaout un deskadur dereat, dinec'h ha tra, doujañs d'o gwirioù ha justis pa vez dleet ? Ha pegoulz e vo achu gant ar bed-se mentadet gant ar feuriañ er bours hag an AAA ?

Hogen kiriek omp holl tamm pe damm moarvat ? Sindikadoù a zo o deus asantet an diasantus, an direol-mañ war-lerc'h an direol-se ha c'hoariet kartenn an dizemglev evit abegoù politikel ha n'int ket mistri warne war ar marc'had. O fennoù gopret a zo pelloc'h-pellañ diouzh prederioù an dud pe divarrek da derc'hel penn d'an urzhioù a zeu bepred eus Pariz. Lod brasañ ac'hanomp a bleg dindan samm an dle ne gred ket sevel e-pad pell a-walc'h. Soñjal a reomp un tammig re eo ar re all a raio en hor plas. « Ne vo ket savet ur bed disheñvel gant tud diseblant, » emeze Arundhati Roy koulskoude. « Brouezomp-

---

8 T.D.O. : Taos war an Dalvoudegezh Ouzhpennet = T.V.A.

ni holl, » a ginnige Stephane Hessel a-raok mervel. Klaskomp en ober 'ta pa vez ret rak evel en doa anataet Etienne de la Boëtie deomp er XVI<sup>vet</sup> kantved, « galloud ar priñs ne dalc'h nemet a-drugarez d'hor mevelerezh mennet ».